

Al labourer, ar maer hag ar Hristen

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Notenn el leor orin : Ar zon-mañ 'oa bet kanet pa deuas an Aotrou Ogustin David, Eskob Sant-Brieg da stagañ ar groaz enor war galon an Aotrou Kerrouz, maer Pleuveur-Gaoter.

War don :Ar seiz Skiant naturel.

Me 'zoñje din da viken dilavar ma zelenn.
Pa 'n-eus greet din ho Pastor adstignañ he herden.
Deus, emezañ, da ganañ, eun den 'zo bet fidel,
E-pad kant vloaz, d'e Doue ha d'e vro Breiz-Izel.

Bevet 'n-eus bete kant vloaz ! Rag en trouz ar hêriou
E vuhez 'n-eus ket uzet o klask an enoriou.
Al labourerien-douar, tud a doujañs Doue,
Chom pelloh o nerz gante, o-deus hirroh buhe'.

Bevet 'n-eus bete kant vloaz ! Ha kalz all eveltañ
A gaver en Breiz-Izel, an douar a garan.
Koulskoude, war bep tachenn, da gregiñ 'n eur benveg
Er brezel 'vel er parkou, dre oll int kaloneg.

Bevet 'n-eus bete kant vloaz gand Doue benniget
Rag e labour hag e vro meurbed en-deus karet ;
Azezet en-dro dezañ, sellet e vugale,
N'larfe den 'vez o zad-koz p'hen gweler o vale.

Koulz e talhas ar zeizenn evel lost an alar,
Hag an oll dud, er barrouz, en eur vouez a lavar
Eh int bet hanter-kant vloaz renet gand madelez,
Dre gomz ha dre oberou a brezege ar furnez.

Liez gwech 'n-eus lakaet amezeien luziet
D'en em gordañ, adarre, evel koz vignoned ;
Da beb unan ar Barner 'displege al lezenn,
Ha digoust eh eent d'r gêr, dihunet o hudenn.

Pa weljom ar groaz staget war e galon,
Biskoaz tra na oe kavet greet gand mui a rezon ;
Med ha pa na vije ket ar Maer koz *dekoret*
Dreist an oll dud, tro-war-dro, 'vije bet enoret.

Bepred ez eo bet Kristen ! En on bro hebdale
Ne vo ken kavet divoaz tud a Feiz marteze,
Ni oll 'vad da vihannañ a heuillo o roudou,
Ni 'vo fidel d'al lezenn a zo skeul an Neñvou.

Bepred ez eo bet Kristen ! Nann 'vad evel hirie
A zo c'hoant da zervij an diaoul ha Doue ;
Kamm e vezer euz an daou du, treitour d'an diou lezenn :

Deoh ar gwir ! Arhoaz ar Gaou. Se nan eo ket kristen.

Bepred ez eo bet Kristen ! War e dal pep hini
'Wel ar peuh 'zo en e ene hag a nerz e gozni.
Ar peuh-se a ro Doue, er bed-mañ, d'ar hristen
Evel arrez da hortoz en Neñv ar hurunou.

Kent peurlared ar zon-mañ, c'hoaz eur gerig bihan,
Bennoz Doue d'on Eskob 'zo mad da beb unan !
Ken seder e sell ouzom hag a ro e vennoz.
Ma kredom en e gichenn bezañ er Baradoz.